

8N2-4-032

chanté en 1983

Chapelle S. Laurent

KANTIK S A N T L A U R A N S

Saint-Loubitz

Diskan

Sant Laurans, merzer Galloudus,  
Evidomp pedit bemdez,  
Ma vezimp tud a feiz nerzus,  
Gwir vignoned da Zoue.

I

Sant Laurans ar merzer brudet  
En doa kerent vertuzius,  
Hag abred d'ezan oe desket  
Anout ha karet Jezus.

II

'Vit an tadou hag ar mammou,  
Sant Laurans pedit Doue  
Ma c'hellint varzu an nenvou  
Hench mat o bugale.

III

A vro Spagn ez oa ginnidik,  
Mes eno n'e oe ket pell  
Ar zant a ieas yaouankik,  
Beteg Rom, ar ger santel.

Imprimatur:

Quimper le 22/8/1963

+ V. Favé,

Ev. titulaire d'Andeda.



## IV

E kear Rom, brud e barfeded  
 En em skign e berr amzer  
 Eno gant ar Pab oe choazet  
 Ha great Avieler.

## V

Pa ia, dre urz Valerian  
 D'ar maro ar Pab santel,  
 Eveld'han hag en e gichen  
 Sant Laurans 'garfe mervel.

## VI

"'houi am heuillo 'benn tri devez"  
 Eme Sixt d'e vab karet  
 'Benn tri devez, e gwirionez,  
 Sant Laurans oe merzeriet

## VII

Dispennet eo e izili  
 Dre zaouarn ar vourevien  
 E gorf n'eo nemet eur gouli  
 Eus an treid beteg ar penn.

## VIII

War eur 'hrill astennet goude  
 Dindanhan oe c'hoezet tan;  
 Mes kennerzet gant gras Doue  
 Sant Laurans n'e reas van.

## IX

Deskomp, o velet Sant Laurans  
 Ken gouzanvus e boaniou  
 Deskomp kaout kouraj ha fianz  
 En eur zougen hor c'hroaziou.

## X

Ar zant, goude poaniou skrijus  
 Ha varv hag a zav d'an nenv  
 Noz-deiz eno dirag Jezus  
 E ped 'vit e vugale.

## XI

Gant ho skoazel, o sant karet,  
 Ni vevo gwir gristenien.  
 Hag eun deiz e vezimp savet  
 D'ar baradoz 'n ho kichen.